

AR JISTR

I

108

Bea meuz evet eur poudad,
Tankerru ! Hennez a oa mad !
Koulz ha gwin-ardan ha gwin gwen,
Hennez a zigas nerz d'ar penn !
Tankerru ! Hennez a oa mad,
Me mize evet dek poudad !

II

Eur poudad jistr, ô gwella tra
Vid freskaat an ene dua !
Eur poudad jistr zo eul louzou
Hag a lak joa er c'halonou.
Tankerru ! Hennez a oa mad,
Me mize evet dek poudad !

III

Jistr ar Breizad zo jistr bevus
Hennez a lak an dud nerzus !
Jistr ar Breizad eo ar gwella
C'hallfer da gavout er bed 'ma.
Tankerru ! Hennez a oa mad,
Me mize evet dek poudad !

IV

Pa zeuan da di eur Breton,
Dirag ar jistr 'trid ma c'halon :
Gand eun nebeudik minioned,
Eva jistr a zo permetet !
Tankerru ! Hennez a oa mad,
Me mize evet dek poudad !

V

Hallo ! Pötred ar festou kaer,
Bezomp holl lawen ha zeder !
Ar jistr a lak ar sperejou
Da nijal tresek an nevou ! . . .
Tankerru ! Hennez a oa mad,
Me mize evet dek poudad !

TALDIR.